

(168)

Antretion  
Entre Jacques ha Pierres.

Pierres.

Deiz-mat dit, va mignon : ha te zo citoyen ?

Jacques.

Ne allan get respont, pa na oun al lezen ;  
Bea a zo mercou laget a nevez flam,  
An nep nen deus ane a zo eur den infam ;  
Hag e ve den honest, ha carg'et a speret,  
Difennet eo ountan renta serrich sbet.

Pierres.

Permetet eo certen brima da'n neb a gar,  
Da zouten ar roue e zerricha gant gloar ;  
Egal omp oll laget gant al lezen neve.

Jacques.

(169) Ne recevi biqen a neb otorite,  
Ma ne boes troiach, eur c'krim eo an draze ;  
Chasseet e vi jel eus an assamble vras,  
Mar dout paour, honest, fur, ne gavi a nep plaz,  
Nag en departamant, nag e neb tribunal ;  
Goell eo calz evidout ar finviq sod ha fall :  
Bale da glasq neuze eur quir egalite,  
El lec'h ma zeo eur c'krim beza er baourente.

Pierres.

Ne barlantan get dit a citoyen actif,  
Mes da zouten al le, ha te zo pront ha rif ?

Jacques.

Beza pront, beza rif da zouten al lezen,

164

Ep galite actif, zo eur vez ep daou ben;  
 Rac nep n'en de actif a zo qazi maro,  
 Hag evit beza pront ez eo ret beza bes.

Pierres.

Laga evez, Jacques, na vez aristocrat,  
 Rag goël eo calz bremân beza eun democrat.

Jacques.

Ma ve expliqet din an daou c'hir nêve-ze,  
 Rag ini va zud coz ne brononce ane,  
 Me lavarfe ractal pelec'h e ve va lod,  
 Mes ep o anaout; en anzaos a ve sod.

(170)

Pierres.

D'an democrat e plich an oll lezen neve,  
 Hag an aristocrat chanch eun dra a gare.

Jacques.

Ne aprouan get oll ar pey a rêr bremân,  
 Etoez nebeud a vad calz a groug a velan.  
 Pa larân dit ractal qer seler va zantimant,  
 Dizolo da ini, hag em renti contant.

Pierres.

Ne velan nemet vad er Constitution,  
 A meus touët souten eus a greiz, va c'halon:  
 Ar butin marc'hat-mat, coulz hag ar quin-ardant,  
 Na deog, na prevedi, na gousto deomp arc'hant;  
 Choaz a rayomp brema ar velin da vala,  
 Justif a vo rentet dre oll evit netra;  
 Egal e vo an oll laget en triacho,  
 Pep hini dre verit honor a receive.

(171)

Jacques.

Ma vijen eveldout, me a douje ive  
 Ma veljen en oll mad lezen an assamble;  
 Mes neb a vel enni eur fot an disterra,  
 Mar tou e zouten oll eur c'hrim enorm a ra;  
 Ha difennet ez eo eus al lezen neve,  
 Goude aprou un darn, lezel darn a goste.

(172)  
 Ar butun marc'hat mat a zo un avantach,  
 Pehini a bêi, mar preez tam truach;  
 Ar quin-ardant d'abord a zisgenmas izel,  
 Ar butun eveltan a ell pignat kisel;  
 An hoïarn hag ar zaon, pere zo necesser,  
 Da zisgen ar butun a zo rentet goel g'er;  
 Ha deog ha prevedi, an hini zo fermier,  
 Da vesti a renk paea, eb miret un diner;  
 H-ir-ualc'h a zanto ar pezh ar gle da barq,  
 Renk paea da gure a zo breman e carg;  
 Pa gasses da zac'hat d'ar velin da vala,  
 Ne ancoua james ar meliner gobra,  
 Hag oustpen, mar car coll pe miret an anter,  
 Ne eller get breman ober dezian affer,  
 En tas, te a baeo lod ar justic neve  
 Mar ac'heus eun affer, te a baeo are;  
 Egal e vo an oll laqet en truacho,  
 Ha loden peb hini an anter a gresco.  
 Ar choazou a zo gret, a ziscol patant dit,  
 Hag en a zo rentet honor d'ar quir verit.

Piernes.

Dre truach ar bloa-mam ar gle a vo paeet,  
 Hag en truach goude ni a vo soulajet.

Jacques.

Cresqi a ra ar gle, netra ne zeus paeet,  
 Sant madou an iliz pere a zo guerzet,  
 Ha pa ne douchfer gen arc'hant ar c'hoïenchou,  
 E vo impossibl deomp paea hon truachou.

Piernes.

(173)  
 An tax patriotiq, herve a gomprenan,  
 En deus paeet ar gle a voa bete vremen.

Jacques.

Prometet e voa deomp, quir sur a leveres,  
 E peje an tax-se gle ar rouantelez;  
 Mes cresqi a reont, ha netra na chomo,  
 Var lerc'h an otrone a ra hon lezennou.

166

Pierres.

Peg'ement, mar gouzout, a baecomp-ni bemde  
D'an oll Deputerien a zo en assamble?

Jacques.

Peb a c'hoec'h scoet bemde a douchont o zeis-cant,  
Heb conta ar bareo a goust calz a arc'hant;  
Ar rum-all a douche peb a nao scoët bemde,  
Enpad daou vloas antèr, daouzec-cant voa anè;  
Ezet eo gout neuze piou a laer hon arc'hant,  
Ha piou a deu pinviq divar goust payzant.

Pierres.

Calz a labour o deus, hon deputerien qez,  
Beza bemde er zal a zo eun dra dies.  
Ger eo al lojeis, ger beva en Paris,  
Ha ma na vent praet e vent tud diavis.

(174)

Jacques.

An honor da veza mestron d'an nation,  
A glefe izellat priz bras o fansion;  
En discol, en disglo, int esoc'h an antèr  
Evit na te, na me dindan èr an amzer.  
Pa ve eun darn anè apliqet d'o dever,  
Darn all a ve absant o pourmeni dre g'er,  
Ha biscoas, abaoe ma indi di casset,  
Oll assambles er zal ney dint en em gavet.  
Ger eo beva enon, da neb a renq cher vad,  
Mes en neb lec'h ebet ne vero coulz marc'hat,  
Hag an ini 'zebro eur bansion gommun;  
Ha lojeis a zo herve peb sort fortun.  
Ocarion o deus da zispign; ney a gar  
A ve servichet prest, er fezon ma lavar;  
Ha goude lein bemde calz hon deputerien,  
N'en deont qen d'ar zal, rac croq vent er veren.  
Pe chomet en unay eus ar staliou digor,  
El lec'h evit arc'hant ma verzer an honor.  
O dispign estonus ne ampech get anè  
Da baea o gle coz ha da brena leve.

(175)

Pierres.

On laeres sur a ra ar re a gassomp di,

Hag ogmantù hor gle el lèc'h on zoulaji.  
Pa zeo quir gementù, eo poent o chasseal,  
Hag eus urz ar roue senti evel quechal.

Jacques.

Holla, Per, va mignon, toiët oc'h eus souten  
Gement ha mat ha fall a zo en o lezen.

Pierres.

Ar bobl a zo ar mestr, en a ra al lezen,  
Hag en deus ar poussaer, pa ve fall, d'e dispen.

Jacques.

(176) Lavaret ez eus deomp ezeo ni ar mestrou,  
Ha var digare ze e reviner hor bro,  
Gant aon na deurejemp ampech o fallente,  
O deus imajinet on obliza dre le  
Da zouten o lezen eb e examina,  
Ha da zoufr ar pillach, eb lavaret netra.

Pierres.

Pa reont fallente, me no approuvan get,  
Hag ar arc'hant paper na blich get d'am speret.

Jacques.

Toiët ac'h eus Pot-Për, souten an arc'hant-se,  
Pa c'heus toiët en oll approu o bolontè.

Pierres.

Bigen ne zoutenan un dra injust ha fall,  
Mar ameusàn toiët evran evel eun dall;  
Rag souten un dra vat, ha dilezel ar rest,  
Eo dever peb-hini, mar be eun den honest.

Jacques.

(177) Onnes eo ar rêzon pehini a zo coz  
Ma velomp tourmantù hor oll velenen-gôz;  
Ar mad a blije dè hag ar fall ne rê get,  
En defot d'en souten ez int bet chasseet.  
Pa c'houlenner al le eo difennet toiët,  
Ar mat a zoutennint, mes ar fal na rin get,

Gant don ne gomantje ar bobl da zisfiout,  
E r'er dezam aprou, touët ha souten tout.

Pierres.

Mar greont fallentez, na deu get d'am zamal.

Jacques.

Derc'hel ar zac'h d'al laer a zo eur vicher fal.  
Int a rai fallentez, ha te a zouteno,  
Hag ar memes ifern er bed-all o losgo.

Pierres.

Parlantet ac'heus din eus ar c'hos-veleyen,  
Var an afer-ze just e fell din da repren.  
Va Ferson, va C'hure, a voa tud a-fezon,  
Ha deuz ameus deze eus a greis va c'halon;  
Mes perag ne rent-y evel citoyanet?  
Heuil al lezen neve, hag e vijent miret.

Jacques.

Eur reglen eb-justig n'ey deo get eul lezen.  
Fall pe zot erzo sur neb a dou e zouten.

(178)

Pierres.

Beleyen goucoude ha yaouanq ha oajet,  
Souten an neventi goucomp o deus touët.

Jacques.

An droug-louzon a gresq en mesq al louzon-mad,  
Hag ar parcou goella a zo red da c'hoter-mat.

Pierres.

An doierrien o deus speret ha prohibe.

Jacques.

Mar o deus-e int bet, ez int gollet gante.

Pierres.

O touët e credont en em gomporti mat.

Jacques.

Contrel e leveront, na vent o covessât.

Ha poan en deus an eil o terc'hel eglise,  
 En chadennoù Satan bete fin e vue.  
 Hag en heur ar maro en em accuzont oll,  
 Eo al le millig'et coz deze d'en em goll.

(179)

Pierre.

Diavis int meurbet goerza o eneoù,  
 Erit pinvidig'ez pe erit henoriseu.

Jacques.

Dies pe impossibl eo, eb religion,  
 Beza victorius war an dentation;  
 Ar re o deus touet, mes ar veleyen all  
 Bete c'avet plaçou, ne g'evont netra' fall.

Pierre.

N'en dint get ar rebut eus an oll veleyen,  
 Darn a zo disget mad hag a zo touerien.

Jacques.

An heretiget bras o devoa discamant,  
 Mes o ambition fier hag arrogant,  
 O clasq en em zavel dreist an oll er bed-ma,  
 O laqe da goerza en dizurzou brassa.

Pierre.

Mes petra a zifen eus hor beleyen goz  
 Ober ive al le da chom en o repos?  
 N'en eus netra chanchet en hon religion,  
 Eme an touerien, hag a gredan quiryon.

(180)

Jacques.

Hag e ve quir o c'homz, evel ma zeo fos,  
 Lavarret ameus dit petra eo a zo cos  
 Na ell nicun ebet, na b'leg na laiç,  
 Ober al le pouner, al le diabolic,  
 Heb touet aprou oll qement a zecreter,  
 Gresi an trujou, digas arc'hant-paper,  
 Ober injustiçou, didrona ar roue,  
 Guerza an ilizou, ha calz a fallente.

170

Pierres.

Er poent-se e cavan o deus eun tam rézon,  
Ha nonpas tra gomzont eus ar Relijion.

Jacques.

Piou a zalc'h en iliz doctrin an Ebestel,  
Ar Pab, an Esqibien a zo dezân fidel.  
Neb a renonç d'ar Pab a zo schismaticqet,  
Ha mar dint aveurtet, ezint heretiqet.

Pierres.

An douerien a bed hep sul evit ar Pab.

Jacques.

Evit da beurdalla, pe evit ober goab.  
Eur bug'el a bedfe bemde evit e dad,  
Eb heuil tam e urzou, hag en a rafe mad?

Pierres.

Un decret a oblich breman an Esqibien  
Da gas ur quir d'ar Chef eus an Iliz Romen.

Jacques.

Mén a zo consacret Escop er Finistér,  
Pe en eur c'hantou all, ennes eo al lizer.  
Te a zo schismaticq hag eun den divergont,  
Cazet gant an Iliz; ennes eo ar respont.  
Cred, mar qeres, neuze eo eun Escop fidel,  
Recevet gant ar Pab en e Iliz Santel.

Pierres.

Var a lavares din, o stad zo trist meurbet;  
Rag er mès an Iliz Barados n'en deus get.

Jacques.

Me a ya da brouvi dit en eur g'ir pe daou,  
Ezint schismaticqet, mar qerez va zelaou:  
Eun artiel eus ar fe, necesser d'ar christen,  
Ez eo pouvoar ar Pab en oll Iliz Romen.  
Gouscoude an decret a doiont da zouten,  
Ne lez gantan en Franç anep pouvoar a greñ.

(181)

(182)



Dispiant, induljantou, jubile, mission.  
 Oll e teuyont breman digant an nation;  
 Pe evit comz sclerroc'h, inutil int cavet  
 Gant an Iliz nêve evit beza salvet.  
 Jesus a lavaras d'ar Pañ-genta Sant Pêr:  
 Dalc'hit va Espibien, va fobl en o dever.  
 Pe evit implija peñdabenn e gomzou,  
 Conduit va derved ha va oanedigou.  
 "Hoarveo get se, eme an intruet,  
 Digant heritour Pêr ni lamo o terved.  
 Ja, tud millig'et, hag ar re oc'h heuillo,  
 A vo treinet ganec'h d'an tourmanchou garo;  
 Raq anez heuil Jesus, ha miret e lezen,  
 N'ez deus nep barados, mar deo quir va c'hreden.

(183)

Pierres.

Hag ez a zo grêt qen a enep d'ar quir fe,  
 Pe a enep tenor 'hourc'hemennou Doue?

Jacques.

Neb a bec'h en un dra a zo coupabl en oll,  
 Hag eb eur fe antier e c'haer sur da goll.  
 Jesus a lavaras quechal d'e Ebestel,  
 Hag en o fersonach d'ar bastoret fidel:  
 Ar ne a absollet, me absolvo anê.  
 Ret eo, eme ar fe, cavet juridiction,  
 Evit rei d'ar pec'her absolven ha pardon.  
 Mes an touer coupabl n'ez dê get aprouvet  
 Gant an Iliz Romer, pa ez deus-y quitet.

Pierres.

Neb a zo beleyen a zo coveçsoret.

Jacques.

Ret eo, eme ar fe, ma vent c'hoas aprouvet;  
 Bet zo en febr amzer eur quir distinction,  
 Entre urz eur bèleq hag e juridiction,  
 Pa lavaras Jesus d'an Ebestel er goan,  
 Ober ar peç a rê en memor anean.  
 Neuz e vent sacret, mes n'o devoe pouvoar  
 Da rei an absolven da oll bobl an douar,

(184)

172

Gen a lavaras dê euy nebeut d'ar goude,  
 Instrui an oll bobl ha badezi anê.  
 Ar fe a lavare e vosa seiz sacramant,  
 Ha ne chom nemet c'hoec'h dre al lezen brezant;  
 Rag ar Briedelez a zo deut inutil,  
 Beva eller er c'krim gant eur c'hontrat civil.

Pierres.

Avialc'h ameus clêvet var articlou ar fe,  
 Mes lavar din un dra var lezennou Doue.

Jacques.

Da un Doue epgen rent adoration,  
 Eme ar Gourc'hemen, eus a greiz da galon.  
 Adori cant Doue, evel ar bayanet,  
 Pe tremen eb hini evel ar zovajet,  
 En despit da denor ar c'henta Gourc'hemen,  
 A zo eun honestis agreabl d'al lezen.  
 Rag acordi a ra eur gouir brotescion  
 Da oll enemiet ar gouir religion;  
 Protestantet impi ha memes judevien,  
 O deus grêt lezennou iliz an doïerien.  
 Carout a ri Doue, ha carout da nessa,  
 Abreje al lezen a zo er c'homzou-mâ.  
 Mes carout ar C'hrouer, ha dilezel ar fe,  
 Evel an doïerien, impossubl ez eo se.  
 Carante an nessa haq y a zo heuillet  
 En o iliz neve gant ar schismaticitet?  
 Persecuti dre oll, gant eur queldet trist,  
 Ar re a chom fidel da lezen Jesus-Christ;  
 Forci e vinistriet da vont pell eus o bro,  
 O accuzi en fos dirag an distriço,  
 A zo eur feçon all da garet an nessa,  
 Ha feçon Jesus-Christ ne dal brêma netra.  
 Carante d'on nessa evel deomp hon unan,  
 A vije mad quechal, ha breman ne dal man.

(185)

(186)

Pierres.

Ar Gourc'hemen goude, haq 'en a zo miret?

Jacques.

Toïet en ven dreyar ouzomp zo difennet,

Hag al lezen neve, contriel d'ar Gourc'hemen,  
 A gommand alies touet Doue en ven.  
 Rag en peb assamble eo red touet Doue,  
 Hag antren en peb carg eo red touet ive.  
 Touet a gommander er federation,  
 Touet en peb andret, en peb ocazion.  
 Touet Doue en ven hag eb necessite,  
 Eo, na ve grêt eul le en ober a neve.  
 Ze ne ziscue netra nemet an disfiang,  
 Eus ar c'itoyanet, hag eus o c'honsiang;  
 Rag le eun den honest, eur veach ma ve grêt,  
 Nen deus get a gom da veza repetet.

Pierres.

(137) An drede Gourc'hemen hag 'n a zo chomet?

Jacques.

Miret ar z'ul dreyan demp a zo commandet.  
 Dre al lezen neve, a enep d'ar g'enta,  
 Eo red ober d'ar z'ul al labouriou brassa.  
 C'hoas eur Mer, an Escop, pe eur person touer,  
 A gomander d'ar z'ul ha lezel ar C'houer.

Pierres.

Clemente a zo mad var ar Gourc'hemennou,  
 Guelomp da zantimant var ar zacranchou.

Jacques.

Er constitution pini ac'heus touet,  
 Ar z'eisvet sacramant inutil zo rentet.  
 Eb monet d'an iliz, permetet exeo dit  
 Beva evel fried gant Xant pe Mac'harit.  
 Moyenant eur c'hontrat, ec'h elles eb crim,  
 Ha froies da zizuzou a vo tud legitim;  
 Mes a ne vije get merget en decrejou  
 An destruction scler eus ar zacranchou,  
 Rentet int inutil erit ar quistenien,  
 Pa renqer e receo digant an douerien.  
 O receo digante a zo eur c'krim garo,  
 Nemet an absolven en articl ar maro.  
 Ma na eller cavet eur belez catholig,

(138)

174

Ec'h eller e receo digant eur schismaticq .

Pierres .

Oferenni reont qercouly hag ar re-all,  
 Ha pa c'hès d'o ofiç, te a zo meurbet dall.  
 Comunia a res gant ar schismaticqet,  
 En despit d'an Iliz en deus an difennet.  
 Badezi, confirma, ha noüin a reont,  
 Hag ordren belezen dre eur c'hrim a ra spont.  
 Mes an nep zo hardi da receo digant  
 Ar sacramanchou-mañ, a ra eur c'hrim nève.  
 Pinijen nag eured nen dint get sacramant  
 En dorn an intruet, criminel ha mechant.  
 Er Gredo e clevan lavaret ordinal,  
 Eman demeus ar fe ar poenchou principal .

Jacques .

(189)

Se a ra din credi na ell get un touer  
 Recita e Gredo, eb caret disesper .  
 An Iliz zo santel hag ive catholig,  
 An Iliz zo romen qercouly apostolig .  
 Jesus a zo ar chef eus an iliz santel,  
 Fondet eo gant e c'hoad ha fe an Ebestel .  
 Disperset eo dre oll ac'han da zeiz ar varn,  
 Ar Pab a Rom en eus ar pouvoar d'e gouarn .  
 Examinomp bremañ iliz an doierien,  
 Hag hy zo catholig, apostolig, romen ?  
 Neñ deo get catholig, rac n'en deo disperset  
 Nemet var douar Frans, e deus ampeozonet :  
 Mar deo apostolig an iliz patriot,  
 Eo fondet gant Judas, hanvet Escariot,  
 An abostol traytour a verzas hor Talner,  
 Ha bremañ an Iliz, e bried, a verzet .  
 Deus an Ebestel en iliz neñ deus fondet,  
 Eun iliz qer contrél d'ar fe o deus adet .  
 Gen nebeut eo romen iliz ar re doüet,  
 Pa ne lez gant ar Pab otorité ebet .  
 Grit e voa gant Jesus chef an oll ilizou,  
 Difennet eo en Frans senti eus e urzou .  
 Remission ar pec'hejou eo ar juridiction,  
 E deus bet an Iliz (nonpas an Nation)

(190)

Da rei deomp ar pardon eus hon oll bec'hejou,  
Hag ar poentchou - ze tout a gavan er Lyredo.

Pierras.

Petra zo cos eta ma caver touerriyen,  
Hag a ziscol aprou calonec al lezen?

Jacques.

(191) A... il, avaristed, ha calz a ignoranç,  
Eo ar gouir fondamant a iliz nevez France.  
Glasq ar re a g'iri demeus an intruet,  
Unan ar vicoù - man en deus-e cunduet.  
Un ambition vras da gavet henorjou,  
Un attach direglet da gresqi o madou,  
A lezen an iliz ar vrassa ignoranç,  
Eun dispianç formel demeus ar Providanç,  
Pe eur c'hoant criminal da ren en digorjou,  
A rent an intruet qer stang er paroziou.

Pierras.

Penos e c'houzout te pez sort intention  
En deus bet peb hini, ha dre pez sort rêzon  
Ezint en em garg'et hag oblijet dre le  
Da zouten lezennou ar rouane neve?

Jacques.

(192) Gement ini anê a zelaou moez Doue,  
Ha moez o c'honsianç, a zislavar o le;  
A damal an orgouill hag an avaristed,  
Pe eur viç all benag a zalle o speret.  
Darn a voa spouronet, hag a gave dies  
Bera er prizonyou ha soufr an dienez.  
Anzavet o deus oll, pa zint convertisset,  
Eo anval un touer eus eun ene collet,  
Pini zo tourmantet hag en deiz hag en noz  
Gant remortchou cruel, eb caver nep repoz.  
Oll pa en em gavint en peurfin o buerç,  
E c'houlentfont d'abord eur c'hoessour eb le;  
Mes ne obténont qet o mennat diverza,  
Ha dre zorn un touer e renqont finissa.  
Mil boar en deus an eil oc'h ampech eg'ile

176

D'en em dislavaret gent mont diraq Doue .

Pierres.

Nec'hamant a rez din var va zilvidig'ez.

Jacques.

Va-unay coulz ha te e voan bet pell diez ;  
Mes consultet ameus tud Santel ha Savant,  
Pere o deus laget ejet va zantimant .

Pierres.

Penos en em gomport eur c'hristen mad en <sup>Frans</sup>,  
Mar fel dezay miret divlam e gonsianz ?

Jacques.

Ar pey a r'e'h goechal en ober a zo red ;  
Pratiqa ar vertu ha quitat ar pec'het .  
Pratiqa a gleomp gant courach ha calon,  
Ar vertu excelant eus ar relijion .  
Necesser absolu eo d'an oll e c'haret,  
Da honori Doue evel a zo gleet .

(193)

Pierres.

Hac ar vertu-ze just emma va oll scrupul,  
Raq tremen eb ofern ha d'ar goel ha d'ar zul ;  
Tremen eb covessat hag eb comunia  
Da Basq, en amzer-all, ha marteze da vla,  
A gavan oll control da urzou an iliz .  
Ro din var g'ementse, mar g'elles un avis .

Jacques.

Tad Sant Hermenegild en lamas eus e drom,  
En stagas er chaden, en gasbas d'ar prison,  
O clasq ober dezay abandoni ar fe,  
Un Escop heritiq, evel hon re neve,  
A yas abeurz e dad da broposi dezay  
Ar pardon, mar carje ober e basq gantan,  
Pe eur maro cruel ; goell e ve gant ar zent  
Mervel eb na beleg, na pasq, na sacramant .  
Ar zent, en amzer drist ar bersecution,  
A veve eb ofiz hag eb communion .

(194)

Goell calz e voa gante beza meryeriet,  
 Erit mont d'an ofiz an dud heretiget.  
 Gourc'hemen an IJiz ne oblich get ar re  
 Na ellont en miret nemet o coll ar fe.

Pierres.

Fournisset ec'heus din diga meur a rëzon,  
 Capabl d'am fermaat er quir religion;  
 "..." deus calz a re-all na leveres netra.

Jacques.

Un amzer infinit a ranzen d'o c'honta.

Pierres.

(195) Me a lavaro dit, qent erit qimiyada,  
 Ar prez ac'heus lezet, hag a ra din crena:  
 Ar c'hoüenchou santel, occupet nos ha de  
 Da ober pinijen ha da bedi Doue,  
 A zoutenne en France ar gouir religion,  
 Distrujet int dre oll, eb neb remission.  
 Ar veleyen doiet da vont d'o farogion,  
 Goude ma vent hanvet a antre gant armou.  
 Disqibien Jesus Christ a ye evel oaret.  
 Da brezeg an douder d'ar bleizi arrajat.  
 Ar gouir batiantet hag ar gontantament  
 Eus ar veleyen-goz er prison, en tourmant,  
 Am laqa da gredi e santont eun douder,  
 Pehini ne ma get en calon an touer.  
 Goelet a rër ar josa scrivet var o bizach,  
 Var himi an touer e veler an arrach.  
 Commanç a ra santout effet an dizesper,  
 Erruet gant Judas, pa verzas hor Tadner.  
 An traou-ze oll pell zo a rai poaz din em pen,  
 Birvigen, Jacques qes, qen na vin citoyen.

Amen.

(Vol. II, p. 168-195.)